


Poelladenn 1

Mobiliziñ ho kouiziegezhioù

Evel an istorourien, implijit ur frizenn gronologel evit skriviñ an Istor



1. Eus peseurt tu da beseurt tu e lenner ar frizenn-mañ?

☐ eus an tu dehoù d'an tu kleiz

☐ eus an tu kleiz d'an tu dehoù

2. E-barzh ur framm, menegit ar blezad e kroger da jediñ. Blezad petra eo?

3. Lakait 2024 àr ar frizenn é skriviñ ur groaz.

4. Get sikour an destenn-mañ, adkavit pep prantad eus an Istor.

Echuiñ a ra ar Ragistor  -3500 pa krog an dud da skriviñ . An Istor a grog. Rannet eo an Istor e 4 frantad: ar mare kentañ eo an Henamzer get ar sevenadurioù gresian ha roman . Kregiñ a ra ur prantad nevez e 476 pa 'z eo diskaret an Impalaeriezh roman: ar Grennamzer . Pa 'ya Kristobal Colon e Amerika e 1492 eo achuet ar Grennamzer: se zo ar prantad modern . Un troc'h nevez ez eus e 1789  get an Dispac'h gall : ar prantad a-vremañ .

A: _____

B: _____

C'H: _____

D: _____

E: _____

5. Da beseurt milved e klok ar blezadoù:

3500 kent J-K: _____

2024 : _____

6. E peseurt kantved e klok ar blezadoù-mañ:

33 goude J K: _____

1492 : _____

Poelladenn 2

En em lec'hiañ en amzer, kochit ar respont vat

1. Get petra eo krog ar Ragistor?

☐ Get krouidigezh an Douar

☐ Get donedigezh ar Mab-den

☐ Get donedigezh an dinosored

2. Get petra eo achu ar Ragistor?

☐ Get ganedigezh al labour-douar

☐ Get ganedigezh ar skritur

☐ Get dizoloadenn an tan

3. An dud a ra furchadennoù a-benn dizoloiñ roudoù an amzer tremenet zo...

☐ Istorourien

☐ Arkeologourien ha paleontologourien

☐ geografourien

4. Anavezout a rit ul lec'h e Breizh get roudoù eus ar Ragistor?

Ma anavezit, lârit pelec'h ha petra?

Poelladenn 3

An istorourien a implij roudoù, mammennoù eus ar prantad studiet evit skriviñ an Istor.

1. Kenliammit pep skeudenn get an alc'hwez



Ur goudor edan maen er Paleolitik



An den Tautavel (Pireneoù reterel)



Aspadennoù ar piramidennoù Gizeh



Tresadenn Toutankhamon, faraon Ejipt



Livadur-reier e mougev Lascaux

2. Evit pep alc'hwez, islinennit **e ruz** roudoù eus an amzer tremenet hag **e glas** ar c'hinnigoù eus an amzer tremenet n'int get mammennoù gwirion evit an istorourien hag istorourezien.

Poelladenn 4

En em lec'hiañ ha menegiñ àr ur gartenn ar c'hevandirioù hag ar meurvorioù



1. Skrivit ar c'hevandirioù e du (pennlizherennoù)

2. Skrivit ar meurvorioù e glas (pennlizherennoù)

3. Get sikour an nadoz-vor :

-Afrika zo lec'hiet e

Europa.

-Amerika zo lec'hiet e

Afrika.

-Azia zo lec'hiet e
Afrika.

D'ho soñj, eus petra 'vo komzet?



Setu 3 c'hinnig . Tabutit get ho kamarad(ez) a-benn kavout tem kentañ en istor.

- ☐ Ar Ragistor
- ☐ Poblatur an Douar

- ☐ Eus ar Ragistor d'an Istor
- ☐ Ar Grennamzer, ur prantad get kalz a gemmoù

	Tizhet eo	Diaes e oa evidin	Mard n'eo ket tizhet
Poelladenn 1			
1-2-3-4			Sikour a raio an tem nevez 1 da adwelet ha soliat ho kouiziegezhioù
5-6			Ma'ho peus poan d'en em lec'hiañ àr ur frizenn, goulennit ur boelladenn all (poelladenn 1 sikour)
Poelladenn 2			
1-2-3-4			Sikour a raio an tem nevez 1 da adwelet ha soliat ho kouiziegezhioù
Poelladenn 3			
1-2			Sikour a raio an tem nevez 1 da adwelet ha soliat ho kouiziegezhioù
Poelladenn 4			
1-2-3			Evit ho sikour a-benn lec'hiañ ar spisverkoù (kevandirioù ha meurvorioù) ho po ezhom en tem 1 , goulennit ur boelladenn all (poelladenn 2 sikour)

memo

Penaos kavout peseurt milved a glot get ur bloavezh resis?

- Da gentañ eo ret kavout sifr ar milved:
Da skouer: deziad resis eo -3500, amañ emañ 3 miliad a vloavezhioù
 - Ouzhpennit un « 1 » da sifr ar miliadoù hag adlakait e sifroù roman.
 - Na zisoñjit ket resisaat mard eo kent pe goude Jezus-Krist!
- Da skouer:
- 3500
↓
3+1= 4vet milved (IV milved) kent J-K




Arabat eo skriviñ niverennoù ar c'hantvedoù, ar milvedoù, ar roueed hag ar baped e sifroù arab(ar re a vez implijet geneomp).
E sifroù roman a vezont skrivet **bepred**.

4. Respontit d'ar goulennoù en un implijout ar sifroù roman pe arab:


sifroù	
arab	roman
1	I
2	II
3	III
4	IV
5	V
6	VI
7	VII
8	VIII
9	IX
10	X

sifroù	
arab	roman
15	XV
17	XVII
19	XIX
20	XX
30	XXX
50	L
80	LXXX
100	C
500	D
1000	M



Poelladenn 1 sikour

- Lakait er plas mat ur bir a-benn gouzout eus peseurt tu da beseurt tu e lenner ar frizenn-mañ.
- Lakait ur sifr a-benn gouzout pegoulz e kroger da jediñ ar bloavezhioù.
- Livit e ruz ar prantad a-raok J-K hag e gwer a hini goude J-K.



d. Ur boelladenn al evit ar goulenn 5-6 ma n'eo ket tizhet

- Peseurt milved a glot get 2024: _____
- Get 1492: _____
- Get 476: _____
- -2400 : _____
- -1800: _____
- -8000: _____

Poelladenn 2 sikour

1. Afrika
2. Meurvor Habask
3. Europa
4. Meurvor Atlantel
5. Meurvor skornek
- Antarktika
6. Oseania
7. Meurvor Indez
8. Amerika
9. Meurvor Skornek
- Arktika
10. Azia
11. Antarktika

